

divinadell devinette


PEMP DOR LIVET

Erruet ez eus pemp amezeg war plasenn Maez ar Roue e Gwengamp. Heñvel-mik eo o ziez, hag evit-se o deus graet o soñj livañ pep dor en ul liv disheñvel. Prenet o deus neuze pep a bodad livaj : **gell**, **orañjez**, **melen**, **glas** ha **mouk**.

"Fentus eo, eme unan eus an amezeien, ma vefe mesket livioù an dorioù 5 ha 9 e rafe livaj gwer."

"Gwir eo, a respont e amezeg, hag an nor c'hell n'emañ nag e-kreiz ar re all, nag e penn ar steudad. N'emañ ket e-kichen an nor velen nag e-kichen an nor vouk!"

Pourrez-vous retrouver la couleur des portes d'entrée de ces 5 maisons consécutives de Guingamp, au vu des indices donnés par deux de ses habitants ?



adsevel gerioù reconstruire des mots

Ha lennet mat ho peus pennad **Penaos e vez lâret...**? er pajennoù 8 ha 9? Anavezet eo ganeoc'h ar ger **danveziou** neuze ! Implijit lizherennoù ar ger-se evit sevel an eizh ger disheñvel a zo da gavout amañ dindan. Setu eizh termenadur evit ho sikour.

Retrouvez les 8 mots en jouant avec des lettres du mot **danveziou**, thème abordé aux pages 8-9. Et pour vous aider, voici des définitions.

1. Dilun ? **DEIZ**
2. Petra a vez graet ganit pa 'z pezh sec'hed ? **EVAÑ**
3. Azennoù evit fardañ an alumenn **VIOÙ**
4. Evel " kenkoulz " **IVEZ**
5. Gwele ar stêr **NOAZ**
6. Loen divskouarn hir dezhañ **AZEN**
7. O chom en oabl emañ **DOUE**
8. Bezañ glac'haret **DOAN**

klask ar gerioù chercher les mots

Setu e mouk verboù hag anvioù-gwan disheñvel. Kavit, e-touesk ar gerioù da-heul, ar ger heñvelster ouzh ar ger kentañ hag ar ger enepster dioutañ. Grit ur c'helc'h tro-dro d'ar ger heñvelster hag islinennit ar ger enepster.

Voici en violet quelques verbes et adjectifs. Parmi les mots qui suivent, soulignez les mots synonymes et entourez ceux qui ont un sens contraire.

GWAN	<u>KREÑV</u>	IZIL	LOUS	JENTIL
DEBRIÑ	<u>PREDAN</u>	<u>YUNAN</u>	SKIAN	FARDAN
BLOT	<u>KALET</u>	<u>GWAK</u>	LIPOUS	GLEB
TEÑVAL	LEDAN	<u>SKLAER</u>	<u>MOUG</u>	MAT
KERZHOUT	PRENAÑ	<u>REDEK</u>	<u>BALE</u>	KOUSKET
LIORZHAÑ	SELAOU	<u>KEGINAN</u>	TREUZWISKAN	<u>JARDINAT</u>